

G W E R Z
an Itron Varia Drue
TRÉGORNAN



PRIZIAC
Imprimerie de l'Orph. Saint-Michel
1940

IMPRIMATUR :

Saint-Brieuc, le 18 Juin 1940.

E. BELLEC,

Vicaire général.

G W E R Z
an Itron Varia Drue — Trégornan

War don : *Kêr. Is.*

DISKAN

*Itron Varia, Mamm a drue,
Hon skoazellet pad hon buhe
D'ho pugale reït ho pennoz
Ma hellint mont d'ar Baradoz !*

I

Klevet, kristenien Tregornan,
Eun istor vel neus ket unan
Gouest da dom-man dac'h ho kalon,
Istor ho Mam m, hag ho Itron.

II

Douar Tregorn, pell zo amzer
Doug testeni en He c'henver :
Meulodi vras lein an Nenvou
D'hon beleien ha d'hon Zadou.

III

Tostik aman, tal ar mene
War hent Karhaix d'ar Guemene
E veaje kuit a zihan
Ar Finister, ar Morbihan.

IV

Toutes paroles cessantes,
Treminidi, tavet, a grenn,
A rae lies sin ar c'hristen
Hag awejou e taoulinent
Ouz Troad ar Groaz, e rez an hent.

V

Ouz troad ar Groaz, kent mont arre
 Vijent gwelet da bep mare
 O pedi ar Vamm druezus
 A zouge korf he Mab JESUS.

VI

Grets^o fedenn ha kennerzet
 E savent plommac'h da gerzet
 Ha war an dro rent d'an I-tron
 Eur tammik prof hag O C'halon.

VII

Dre forz koueel, an takennou
 A had ar gliz war ar maeziou
 Dre forz kreski, prof pebunan
 Savas iliz en Tregornan.

VIII

Hag en tu klei helled gwelet
 Eur chapel da Vari gwestlet
 Pirc' hiri_ned, tud a fe don
 Zeue bep'bloa, de ar pardon.

IX

Aboe ar c'houezegvet kantvet
 Ouz Kroaz-True ken kaer hanvet
 Divrec'h Doue chomas digor
 War ar c'horn-man deus an Arvor.

X

Ped ha ped gwech an heol-beure
 Neus reñ d'eñ pok ar goulou-de
 Laket he skeud, a ruz-da-ruz,
 Da drei gantan kent mont da guz !

XI

Ped ha ped gwech endro d'ezi
 An aveliou, evel bleizi,
 O deus yudet vit he diskar
 Met gret a ~~da~~ en ~~meur~~ dispar.

He gred ha d'va euz nerez Dispar

XII

Mein, bennerez, gwis ket en man,
 Ouz kroz en avel na rent van
 Ganteur seurt mein talc'har, c'hroaziou
 Velt an dero war ar mazeiou.

XIII

Skilfou an avel a zo ter,
 Gwassoc'h eo skilfou an amzer!
 A dam da dam, ar glao, ar skorn
 A ziskaras..., « Banniel » Tregorn.

XIV

Met Tregornis, koueet o C'hroaz
 Laras raktal : savomp hi c'hoaz
 Ha per bloa goude ar brezel
 E oa n'he flomm en Breiz Izel...

XV

Potred yaouank, daouzek ane
 War o dious-koa, daoust ma tane,
 Wel gwejall ar Cyreanean
 Dougas ar Groaz e kreiz ar c'han!

XVI

Sellet breman war ar c'hlazen,
 He Mab Jezus war he barleñ,
 Sellet, kristenien, ouz Mari
 Lez't ho kalon da c'hla-c'hari!

XVII

Aman wellomp eul labour gaer
 Ar Groaz savet uz d'eun oter,
 Korf hon Salver, korf ^{di}bennet
 War Barlenn Mari astennet.

XVIII

Hag uheloc' h Jezus en kroaz
 Pleget e benn war e skoa noaz
 Ha serret kloz e zaoulagad
 Mez e goste digor dalc' hmad.

XIX

Daoulinomp aman eur pennad
 Peb unan da houll eur mennad.
 Goude pedi ni rei eur zell
 War ar c'horn man deus Breiz Izel.

XX

Dirag ar Groaz, kaera tolen
 Tispak ar Vro velt eur rozen
 Plenen Tregorn... gouriz ar waz,
 Hag ar pellder morennet glaz!

XXI

Tu ar c'huz heol, 'dreuz d'an dero
 A c'hwoarn ar Groaz gant o baro
 Tu ar c'huz heol ni a wel c'hoaz
 Ar meneiou uhel ha noaz.

XXII

Mene San Joseb a astenn
 E walen gein'dan ar vrumenn
 Ha Ker-ar-gad, gant e lann ras
 A sav kichen d'ar mene bras.

Ker-agath

pe Ker-ar-c'had

XXIII

Aman tro dro, o ma Doue,
C'hwi'hag Ho Mamm hon gwel bemde,
Labourerien n'hon farkeier
Pe messaerien n'hon lanneier.

XXIV

War ho tal c'hwi, deus lein ar Groaz
Neus divered ar Gwad, siouaz
War hon zal ni, kreiz al labour
A hed ar bloa tiver an dour !

XXV

Ho tivrec'h ^pbaour, bet int brevet
Ken pell ma int chomet skouret !
Lies gant hon micher garo
Hon re a ve hanter varo.

XXVI

Toliou skourje an eus blonset
Ho Korf santel bet diwisket
War ar maeziou ar gwal amzer
A flemm rust korf al labourer.

XXVII

Rak-se p'az omp ho kwir vreuder
Bezot True, o ma Salver,
Ouz buhe al labourerien
A ve bemde er binijen.

Peden d'ar werc'hez

XXVIII

Breman p'az omp holl dastumet
Dirag ho skeuden daoulinet
Ni ho salud a greiz kalon
Chwi hon Mamm vad ag hon Itron

XXIX

Deut omp hirie velt hon zadou
Da ganan dac'h meulodiou :
Ni a dale'ho, pad hon buhe
D'ho enori, mmam a Drue.

XXX

Evidomp ni ouz troad ar Groaz
Peus gouzanvet eun anken vras
Ken a larec'h, gant melkoni,
Neus ket eun ^{eur}boan velt ma hini !

XXXI

Deut eo hon zro war an douar
Da gerzet war Hent ar c'halvar
Evelt ho peus heuilhet Jezus
Bezeta genimp. Mamm druezus !

XXXII

Velt hon zud Koz, gwir Vretoned,
D'ho Mab Jezus vimp mignoned,
Keit ha pado-an derv en Breiz
Ni a viro ar Fe n'hon c'hreiz.

Grwengolo 1936.

A. LORQUER.
(Mab-Sulon).